

ER BASION VIHAN

(Stumm Jint Ijo)

Chilowet oll ha klewiet
 Kano er Basion vinniget
 Dirak er loer hag er stered
 De Zalver er bed ma zavet

Seiz uzer ha perugent
 Zo eit d'er Jardin Olived
 Ewit treizo Zalver er bed
 Med in treizo ne riant ket
 Kar Doue ne bermeto ket
 Nan hwelet or maro kalet

Laket e oe 'no bassefos
 Lem ne wele na dé na noz
 Med or steredenn war-dro zerr-noz
 Hag on ael ar dro hanternoz
 Pe ganna 'n el ir Baradoz

Hag on ell hoes d'er howlow dé
 Pe ganna 'n el dirag Doué
 En annawn powr e ra iwé
 'houlenn pardon wid o iné

On dé e teuy war en douar
 Biskoaz na neus gwelet i barr

I trayo mein, i fowto gwé
 Klozo en noz ar greiz en dé
 Setu er jujeman Doué
 Separo 'r horv deus en iné
 Setu er jujeman Doué
 Zavei er ré varv deus o bé

On elig pihan deuy barz er vro
 Gantan or horn hag e gorno
 Klewet e vo per horn er vro

Laret e rey fasileman
 Erru é dé er jujeman
 Hwiamp jujet koz ha yaouank

O nag e laro magnifik
 Kenkoulz d'er powr wel d'ar pinvik

Setu er jujeman Doue
 Red e vo kwitad er bed mé

Zant Mikel e teuy ivé.
 I valansow deus i gosté

Zant Mikel gand i valansow
 E bouizo dim om inéow

Er Werc'hiez Vari deuy iwé
 Hi chapeled deus hi hosté

Hi chapeled hanter kant gran
 Tri ugen livr bouez unan

Hag e dolo graniennow
 I balansow en tu déow
 Wid zouten deus hom inéow
 Wid ma dreho 'n gwir deus er gaow

Ma dreha en droug war er wad
 Kemse rey dim ni kalonad

Ma dreha er wad war en drouk
 D'er Baradoz e hiamp tout.

Pasion gri pasion galet
 Setu er Basion diskleriet
 D'er Zalver er bed ma zavet

En hein 'in oer hag in laro
 Dow hant dé pardon ni a vo

'n hein hi oer ket hag in chilow
 Hez nivo lowd ir meritow

En hein in oer hag in lar ket
 Hes e no binijenn galet.

Setu er Basion diskleriet
 Ha Doué de vézan meulet !